

**Anatole Le Braz :Sant-Servez 1859 – Menton 1926.
Mab ar skolaer laik.**

Nedeleg ar Chouanted : troet diwar galleg Anatole Le Braz, bet embannet e brezoneg (n'eo ket merket gand piou e oa bet lakaet e brezoneg), e 1913. Modernnaet eo bet an doare-skriva).

Tri deiz zo, an erh a goueze, kazi hep paouez ; an deiz ne oa ket evid parañ a-dreuz d'an oablou izel ha du-pok ; ne vije bet gwelet takenn da greisteiz paneved d'ar sklêrjenn drist a darze euz ar parkadou erh. Pell ha pell e save eur wezenn bennag, tagosou derv kromm ha kromm, 'vel daoudordet gand ar riou. N'eus nemed e Breiz-Izel hag e weler ar gwez paour, merzeriet gand an aveliyou gwalarn, o vezañ ken distumm ha ken glaharuz.

Kement-mañ 'ta a dremene er horn pellañ euz broiou kuz-heol, derhent gouel Nedeleg, ar bloaz 1793.

Pa laran derhent Nedeleg, n'eo 'med kement ha lared, rag nebeud a dud a oa o fenn gand gouel Nedeleg er bloaz-se ; kaer ho-pije bet selled en-dro deoh, netra 'ni-ije roet deoh da houd e oa degouezet an noz santel. 'Baoc n'oun ped ha ped miz, an ilizou a oa goullo, heñvel, e-kreiz tier ar bourkou ouz intañvezed pe ouz beziou. Ar yeot a vounte etre ar paveou dispeget ; en-dro d'an aoteriou ne oa ket garlantez nemed louedadur ha ban (?),

anvet al lehiou dilezet. Ar hleier a oa eet en hentchou pe a oa e-pign ouz o stern, kollet gante o mouez, o ene. Ha Nedeleg heb ar brall sklentin a ziston laouen dre an avel, daoust ha Nedeleg eo ?

Steredenn ar Hinivelez, zoken, ne lugerne ket en bolz an neñv. Ne oa ket eur goulou en êr ; ne bare ket eur skleur ‘dreuz ar berniou koumoul ken teo, ken pounner, ma oant heñvel ouz berniou mein, ‘vel pa vije bet savet eur voger etre an douar hg an neñv. An douar ivez a oa noaz ha goullo ha, da weled, heñvel ouz eur goueleh. Ne oa roud ebed a dier. An erh e-noa astennet dre oll e gompezenn fromuz. Eun daolenn euz broiou pell an hanternoz ! Evel-se, moarvad, e oa an douar a-raog ma oa ganet ar sklêrijenn. A vare da vare, e vije klevet o youhal en amhoulou bandennou foll an arneou kounnaret, ha brudou iskiz, ‘vel trouz redadeier, o tiston du-hont, er pellder. Ha kerkent tavet pep tra ; ha, dre-oll, eur sioulder a varo ; hag ar halzennou gwenn a goueze adarre, munut ha didrouz, evel eur hlistenn a vister.

Ha setu soudenn, e-kreiz ar gouezoni, skeud eun den en em ziskouezas, hag eun all, da heul, ha goude eun drived. Dond a reent, an el war-lerh egile, etre a diou regennad gwez a verke an hent.

« Pebez abadenn ! » eme unan aneze e galleg.

Ar paotr a-raog a zistroas evid respont :

« Bezet dineh bremañ. Sur on da vezañ war an hent mad. A-raog eur hard-eur amañ e vefom arru. »

Gwiskamant Gwened a oa gante, ar chupenn krohenn dañvad, ar bragez berlaj du stardet war ar hlin hag ar gammachou ler. O-zri e oant armet, beb a fuzul gante, he beg du-mañ dreist d'o skoaz. Diouz o dillad hag o stumm e oa êzet goud e oant chouanted.

« Setu, mestr, a lavaras ar paotr a-raog, ar wech-mañ on sur... Om e-kichenn kroaz Keralzi... Ar verouri a zo en tu kleiz... Eur hant kammed bennag, d'an hirrañ. »

Mond a reent en erh beteg o daoulin. Eur seurt pikern 'n em gavas dirake.

« Grik ! Setu al lojeiz ! »

Ober a rejont an dro, war evez, o klask an nor.

« Setu-hi amañ », eme ar paotr a-raog, « goustadig. »

An daou all a armas o fuzuillou, goude bezañ lamet ar mouchouer o-devoa laket war ar hi evid harz ouz ar glebour. Ar verouri a zeblante bezañ goulo.

« Eun treitour bennag en-devo kaset kelou d'al lapous, hag e vo nijet kuit », a lavaras an hini na oa deut ger ebed ganatñ c'hoaz.

N'oa ket e gomz peurlavaret, pa oe klevet eur vuoh o vlejal 'barz ar pez lojeiz harpet ouz an ti.

« Ma vije bet roet kelou dezañ, mestr, en-dije bet kaset al loned gantañ », eme ar paotr a-raog.

« Gwelet e vo ! Sko bepred ! »

Eun taol dorn war an nor dero, ma sonas ken trist ha plankenn eun arched.

Eur vouez voan a respontas a-ziabarz, en brezoneg ;

« ‘H an da zigeri ! »

Ar grogenn a wigouras, ar hlañched a zavas, ha, dre an nor damzigor, an tri chouan a yeas en ti.

Noz du-dall a oa ennañ. Ar vouez voan ha raouiet a lavaras deuz kreiz an deñvalijenn :

« Pardonet ahanon. N’oan ket en gortoz ahanoh ken abred. Mamm a lavare din c’hoaz, bremañ souden, ne deujeh ket armet da daol an hanternoz. Mez bezañ zo glaou war an oaled, e-mesk al ludu. Ne vin ket pell o kregi al lutig... »

Eur bannaig goulou glaz a darzas e penn unan euz an alumetezennou a hiz koz a ree ar gouerien d’ar houlz-se gan till kanab seh hag eur begad souffr. En korn ar chiminal, ar goulou-lutig, eur hi o terhel anezañ, a grogas en eur strakal.

Hag an tri den a welas en e zav war an olaed, en e roched, eur paotrig hag a vousec’hoarze oute.

« Mar plij ganeoh », emezañ, » e tistroin d’am gwele, rag, abaoe eo krog ar goañv, eh on skoet gwall-glañv. »

Klañv ? O ya ! n’oa ket ezomm da vezañ bet er skol evid gweled e oa prest da vervel. A-boan ma oa c’hoaz

eur beradig buhez dindan e dammou eskern, taget ma oa gand ar hleñved.

Poullou e zaoulagad, digor-frank gand an derzienn, a oa toullet a-dreuz da dreuz d'e zremm skarzet ha sklêr.

O weled e taole an tri den sellou a druez warnañ, e lavaras :

« Marteze e parein d'an nevez-amzer ; mez ar goañv a skorn ma izili. »

Sevel a reas gand poan war ar bank-tosel :

« A ! eemzañ en eur distrei, ankouad a ran. Gor a zo aze en ho kichenn. Seh mad int hag e krogfont raktal. Nemed e pedan ahanoh da hwezañ hoh-unan war an tan ; me, n'hallfen ket, mougañ a rafen... »

Ar paz a stagas warnañ ken gwaz ma 'n-ije kredet an nen e oa e dammou eskern o vond da vezañ bruzunet.

Ar chouan a veze greet "mestr" anezañ gand an daou all, a dapas anezañ etre e ziouvreh, eh astennas gand klaz evez war eun tamm koz golhedad pell a oa dindannañ hag a zachas an dillad war e vruched. Dremm ar bugel a oa sklêrijennet gand eun dudi, eul levenez dispar. Komz a ree adarre dre lajadou, hag e poke gand teneredigez da zaouarn ar chouan en-devoa tapet krog enne.

*

Eur haouad tan a flammine ‘barz ar chiminal. Ar hlañvour bihan a zorhennas hag ar mestr a deuas da azezañ e-kichenn e dud.

« Eun taol brao ! E teuan amañ evid lazañ an tad ha setu e rankan luskellad ar mab. Boihardi plah bugale ! On mignoned ne gredfont biken !

Souezuz a-walh eo, en gwirionez ! Ar marmous fall-ze, gand ar stumm ankou ‘zo warnezañ hag e vouez klemmuz, en-deus badaouet ahanon... Ha c’hoaz n’em-eus intentet foueltr ger ‘barz ‘n e gont... Dal, Pendir, lar dim petra ‘draille gand e goz brezoneg ?... A ! bez war evez ha kaoze goustadig. Me ‘fell din e kouskfe didrouz ar hanfard-se ! »

Ar paotr a gomzed outañ evel-se a chomas eur pennad heb respont. Erfin e lavaras, en eur voustrañ war e vouez hag en eur daol war-zu ar gwele sellou sehet :

« Me ‘gred penaoz paotrig Keralzi eo mesket e spered gand ar hleñved. Seul-vui e soñjan en e gomzou ha seul-vui o havan dibenn... »

Ar ger “sod“ a oa war e deod, med ne grede ket lared anezañ, gand aon a walleur.

« Kont dim ha na rez ket kement a ardou ! »

Pendir a zisrelavaras en galleg komzou ar paotrig, pa degemere aneze.

« En gortoz e oa ahanom, med mann nemed da hanternoz ?... » eme Boihardi ; souezuz eo, a dra zur... Bet sur en-devo bet kelo' e oam o tond war e dro... Mez, da genta, greom ar furch... Kement-mañ n'eo ket reiz !... Spenn-Gwenn, kemer al letern », emezañ d'an eil chouan. »

Ober a rejont sioulig tro an ti, o tigeri ar presou, o feukañ en pep korn teñval gand kanol o fuzuliou. Goude, e furchjont al lojezi all ; 'barz ar hraou ne gavjont nemed eur havr hag eur vuoh, he-devoa blejet pa oant oh arruoud ; 'barz ar marchosi, avad, e oa daou a gezeg vad kousket ouz o zav, o fenn war bord o frezeb.

Greet o zro gante, e tistrojont d'an ti, heb bezañ gwelet roud ebed euz an hini a glaskent, merer Keralzi, Yvon Lestrezek.

Ar zunvez a-raog, eur chouan, hag e oa ar Re Hlaz war e lerh, a oa deut da glask repu er verouri ; 'pad eun devez, Yvon Lestrezek en-doa roet dezañ boued ha lojeiz ; mes touellet e oa bet gand ar yalhad arhant kinniget evid peb chouan paket, hag en-devoa gwerzet hemañ d'an archerien. 'Vid ar torfed-se, pennou braz ar chouanted, bodet en Gwened, o-devoa barnet anezañ d'ar maro. Ar varnedigez a douge en-dije eun tenn en e benn, e vije diwisket ha staget en noaz ouz kroaz Keralzi, an ano "Judaz" skrivet war e beultrin gand beg eur gontell.

Boihardi ‘oa bet karget da rei e gont d’ar merer. Daoust d’an erh ha d’an avel kounnaret, daoust d’ar Re Hlaz stlabezet dre ar vro, eet e oa an hentchou ! ‘Vel letanant, e-nevoa kemeret gantañ Spenn-Gwenn. Penn-dir, eru brakonier euz Tregon, eur reder-bro, a oa ‘vid diskouez an hent ha komz brezoneg. Ar peurrest eh ouzer.

Braz ha gweñv, ledan a ziskoaz ha moan diouz e greiz evel eur plah, divaro e henou, eur zellou eeun ha dispont en e benn, eur fri sparfell hag eun diouveuz lipous dezañ, rustoni ha madelez mesket war e zremm, setu poltred Boihardi evel ma oa eno, etre daou gamarad, euz sklêrijenn an tantad gor.

Dre stalafou e wele damdigor, ar hlañvour bihan dihunet a droas etrezeg an tri chouan, e vleo, liou d’ar plouz, luziet en-dro d’e zremm koaret.

« Marteze ‘peus naon, emezañ ; Bezañ zo eun dorz vara segal ‘barz ar pres, ha war lein ar plankenn ‘zo aze e-pign ouz an treust, e kavfet eun dailenn gig-sall en eur plad stên. »

Penn-dir a zisrevelas kement-se d’ar mestr.

« Trugareka anezañ, eme hemañ ; ne larfom ket nann. »

Prestig goude, e oant o-zri ouz taol. O baleadenn dre greiz an erh he-devoa degaset naon dezo ; debri ‘rejont a galon vad. Boihardi a rias urez da Ben-dir, hag hemañ,

hep koll genaouad ebed, en em lakaas da guriuzi ar bugel, o trei en brezoneg goulennou ar mestr hag en galleg respontchou ar bugel.

« ‘Teus ket laret e oas en gortoz ahanom ? Goud a rez ‘ta piou om ? »

« Ya, sur. Bremañ zo tri bloaz, pa vije greet c’hoaz katekiz ‘barz ar bourk, eh een bep sadorn d’an iliz. Ar person, an hini a zo tehet da Vro-Zaoz, en-devoa kontet dim aliez e istor, hag am-eus dalhet soñj euz o anoiou. »

« Peseurt anaoiou ‘ta, mar plij ? »

« Gaspar, Melchior ha Baltazar », eme ar bugel, ‘n eur regennad, war don eur gentel desket dre eñvor. »

« An inosant kêz ! », eme Boihardi ; « ‘vid tri Roue an Orient e kemer ahanom ! »

Penn-dir a houlennas adarre :

« Neuze da vamm he-devoa la ret dit e teujem ? Mez penaoz he-deus kredet lezel ahanout da-unan, klañv evel ma ‘h out ? »

« Ar bevañ a zo tenn ha ni n’om ket pinvidig. Eun toullad deiziou ‘zo eh a gand ma zad, beb noz, da vaner ar Zaliou, eun hanter leo ahann. O nozvez a dremenont o tillad lin ha ne distroont nemed nemed d’ar beure. N’eo ket dre ma plij dezo mond e-giz-se. Mamm a ouel dalhmad en eur guitaad ahanon. Mdez ma zad a lar dezi :

« Red mad eo ! Red mad eo ! » Hag eh kont en o zro. Pa ver paour, ne reer ket ‘vel ma karer. »

Boihardi a zoñje ennañ e-unan :

« Al lapous en-devo santet c’hwez, nemed ha kelou e ve bet kaset dezañ. N’eus forz, kaer en-devo, ma dapo ma zu warnañ. »

« Fenez, eme ar bugel, o-desu lavaret din : Mar skoer ouz an nor, digor anezi ha n’az-pet ket aon. ‘Pez soñj penaoz, noz Nedeleg, emañ an êlez war bale dre an hentchou. »

Spenn-gwenn a estlammas :

« Sell ‘ta, emezañ, noz Nedeleg eo sur ! Adkoan Nedeleg eo hemañ ! »

« Evel-se ‘ta, eme Penndir, ne ‘teus ket bet aon ouzim ? »

« Er hontrol, gwall laouen e oan. Ken pell on bet o hortoz ahanoh ! Kaer am-ije lakaad ma botou er fornigell, ne gaven enne, an deiz warlerh, nemed an dornad plouz am-ije lakaet an noz a-raog.

Deut e oan da gredi penaoz Keralzi ne oa ket war e hent. Ar vugale all euz am oad a diskoueze din ar berniou treo’ kaer o-dije bet digand ar Mabig Jezuz, dre zorn ar rouane’, ar vesaerien pe an ebestel. Ne oa nemedon ha n’en-dije netra. Mond a reen da ouelañ ‘dreg ar forn, n’e’

ket c'hoaz abalamour d'ar pezh n'am-bije ket bet, mez abalamour ma kaven trist bezañ ankouaet evel-se. »

Mamm a lavare din evid ma frealzi : « Tav, tav Jobig ! Gweled a ri, ar bloaz 'deu, mignoned ab Aotrou Doue a degaso dit eur gwiskamant nevez-flamm ken glaz hag an neñv, gand boutonou olifant ken lugernuz hag ar stered. » Me a lavare nann. N'am-boas ken fiziañs ebed. Ma vijeh chomet eun Nedelg all c'hoaz heb dond ; me 'zo sur e vijen marvet gand a geun 'm-bije bet. Setu, p'am-eus klevet ahanoh o skei war an nor, prest a-walh e vijen marvet gand al levenez 'oa 'n em halon.

Ar paourig a rankas tevel. Ken sammet 'oa ma teuas ar ronkell dezañ. Koulskoude, e reas eun êsa c'hoaz da houlen :

« Degas a refet anezañ din, n'eo ket 'ta ? Ar gwsikamant glaz ha boutonou olifant warnañ ? »

Boihardi a zavas 'n e zav 'vel eun tenn. Diou dakenn dour a ruille war e zioujod. Eur zell a reas ouz e voñtr : deg eur e oa.

« Penn-dir, emezañ, lavar dezañ kousked dineh, penaoz warhoaz, kerkent hag an deiz, e vo an dillad aze ouz e wele, chupennou ha bragou. C'hwi etrezoh, bet war evez ken na vin disto ha, d'an disterrañ trouz, et da gas ! »

Eet e oa dija er-mêz.

Klevet e oe trouz eur marh ‘barz ar porz, eur vouez o huchal : « hop ! », ha kekrent eur pimperlamm mouget soudan gand sioulder an erh.

*

Gwenn e oa an erh, liou moug ha teñval ‘vel eul liñsel gañv. Ha war ar hompezennou divent, an oablou a zsikenne mui-ouz-mui, ‘vel eur golo du, ‘vel eur pikol mên war eur pikol bez.

Piou bennag a vije bet, en noz-se, war an hentchou (evel ma lavar ar zon), en-dije greet e zin ar groaz, gand ar spont, o weled o tremen aneval an Apokalips...

Boihardi a oa, war e varh, o vond da gerhad dillad nevez da baotr bihan Keralzi. Mond ha mond a ree, krog en moue e aneval, e jod ouz e beultrin, ‘vid trohañ êzetoh an avel.

Mez selaouom bremañ ar wez koz bet savet, hervez, gand eur piker-mên, ha zo bet kanet abaoe, ‘barz an oll bardoniou, gand ar varzed-valeerien.

Ar bloavez seiteg kant pevar-ugent trizeg, en noz derhent Nedeleg, - Ken gwaz avel hag erh ma ranke ar brini –Er hleuzennou dero chom da waskedi. »

An erh a goueze, an avel a hweze.

*

Ar vugale vihan, en tier plouz, A oa trist hag a zoñje :
Gand an erh hag an avel, Jezuz ne gredo ket diskenn ?
Hag on boteier a chomo goulo.
An erh a goueze, an avel a hweze.

*

En despit d'an erh, en despet d'an avel, A-dreuz ar
traoñiennoù ha menezioù, - War eur marh noaz, heb dibr,
na brid, na stleugou, -Boihardi a rede koulskoude - Forz
peseurt amzer d'ar chouan !
An erh a goueze, an avel a hweze.

*

'Vid sklêrijenni e hent – N'eus nemed tan e
zaoulagad, - lugernuz evel mein luf ; -Hopal a ra war al
loen. Primoh ! – Primoh evid ar mare eh a an aneval.

An erh a goueze, an avel a hweze.

*

E toullou ar girzier, ar haouenned – A houlene an eil digande eben : « Peleh eh a Boihardi ken prim ? Pe dorfed a zo c’hoaz en e zoñj ? Pe verouri eh a da zevi ? »

An erh a goueze, an avel a hweze.

*

Ar bohig-ruz, lapous ar Halvar, -D’ar hanaouenned ‘n-eus respontet : « Boihardi, al lazer tud, ‘vid eur wech en-deus cheñchet giz. » -« Ra deuio Doue d’hen paea ! »

An erh a goueze, an avel a hweze.

*

Boihardi d’an daoulamm a ya. – ‘Vid senti ouz c’hoantadenn diwezañ eun inosant kêz klañv. « ‘Barz gwele kloz Keralzi. Ra vezo war evez ! Ar mor a gresk...

Ar gêr vihan a oa ‘vel dastumet ‘n eur bern, du-pok ez-eeun d’an dremmwel loued, en tu all d’eun drêzenn don, ar seurt ma toull ar mor braz en plegiou an douar

breton, ha ne deu d'o gweled nemed da reverziou ar geidell. geidell : kedez.

Treid an aneval a zone bremañ war eur chaosell biliennou. Eur c'hwez hili put a zave a-douez an deñvalijenn.

Souden ar marh hag ar paotr a zantas an douar o terhel a-zindan o zreid. Eun dra wak ha yen-sklas a groge enne d'o lonka didrouz.

« Ar mor ! eme Boihardi ; n'em-boia ket soñjet en kement-mañ »

Skei a reas e zaoulin en daou gostez e aneval, arru berr warnañ, hanter-veuzet, hag o tapoud krog gand e zent en unan euz euz ziouskouarn savet a-bik gand ar spont :

« Hagn ! », emezañ.

An taol dant kriz-se a reas d'al loen ober eul lamm 'n eur leuskel eur yudadenn, gand ar boan en-devoa bet.

« Deut eo ! », eme ar chouan.

E oant dija war an aod en tu all.

Ostiz Penn-ar-Bleiz a oe diêz da zihuni. Eun dro bennag e tiskouezas ouz ar lukan e benn teo ha ruz-tan, evel pa 'n-ije bet eun taol gwad.

« Piou ‘zo aze ? »

« Evid Doue hag ar roue ! », eme Boihardi. « Digor prim, marvasenn ; mar n’az-teus ket c’hoant e teufe on paotred hebdale da drohañ dit ar c’hoant gwele ! »

Yann Tarrideg ne oe ket red lared dezañ diou wech. E wreg, e verh Levenez, ar paotr marchosi, an tiad a-bez, a oe souden war droad.

« Kerh d’am aneval da gentañ ! ‘Raog eun hanter-eur amañ, e fell din-me na ve ket warnañ eur vlevenn hleb. Ha taol dezañ eur chopinad gwin-ardant en e gerh ! »

Eur wech roet e urz d’ar paotr marchosi, ar chouan a droas ouz an ostiz, a oa o krenañ eno ‘leiz e grohenn, eun tamm gand aon, eun tamm gan ar baourentez, o vezañ ne oa warnañ nemed darn euz e zillad.

« Te, ‘vid deski dit da vicher a chouan, e tlejen kas ahanout ganin d’ober eun dro en kêr, er stad ma’z out aze. » Med n’oa ket eur gwall den. « Kerz d’en em wiskañ keid ma tiskouezin seuliou ma botou d’an tan. »

Ar vatez, gand skoazell Levenez, - eur vleuenn hran diwar a aochou, c’hwez vad ar bezin fresk en he herhenn, - ar vatez eta he-devoa taolet skolpad war ar glaou. An trebez war an tan, ar bellour war an trebez, hag ar plah yaouank, e-keit-se a vaze uou. **bellour : ?**

Boihardi a heuille ar monedone-ze diouz kreiz ar vogedenn a zave euz e zillad brein. Gratis e ree dezañ ‘n

em gaved eno en eur gegin gempenn ha klouar. Daoust pegen kalet e oa, e evaj de', e haloupadenn noz he-doa brevet e izili. Ha neuze, kaer 'n-eus an den bezañ eur reder bro, eur boudedeo, ne vez ket evid harz, en eur dremen, ouz sorhenn eun ti kloz d'an avel en e gounnar, eur repu leun a zioulder, tan sklêr o flamminañ en oaled, hag eur plah iskuit ha skañv o vond hag o tond 'n eur vousec'hoarzin ouzoh, gand ar blijadur he-deus o vezañ ho matez, ho servijerez.

Dija ar chouan, goude eur pred mad, a 'n em zante astennet 'n eur gwele blod ha klouar , c'hwez vad ar bleun prajou gand al liñseliou, abaoe an hañv tremenet.

Nemed, en eun taol-kont, euz ar gwele-ze eh eas e spered da gad eur gwele all, du-hont, gwele Keralzi, gand e vank-tosel dero, e stalafiou du, e holhed kanab, pell koz enni, e wiad kevnid leun a gelien maro, hag an druillenn astennet warnañ, e-leh ma oa eur paour kêz krouadur bihan o tennañ e huanadou diwezañ, hep klemm ebed, o soñjal er chupenn boutonou olifant keid gortozet ken, moarvad, n'en-dije biken an eurvad d'he dougen.

Hijañ a reas e bennad bleo du leun a zour-mor ha, gand e droad, e vountas a-dreñv ar bellour 'leh ma kleved dija son an amann rouz.

« Ta, ta, ta ! emezañ, klenket an treo'-ze ! N'eo gand se on bremañ. »

An Tarrideg a oa o t ond e-traoñ gand ar viñs, paket en eur vantell, eun hanter dousenn kravatennoù gloan endro d'e houg.

« 'Vel-se, da vihannañ ! eme Boihardi, selle, te 'zo diriskl da dapoud anoued !... Klev, bezañ 'teus, e-touez da vignoned, unan bennag hag a zo kemener ? »

« Ya. »

« Deom de' raktal ! » **de' : dezañ.**

Ar marhadour dihunet e-kreiz e gousk a hrozmolas, moarvad, ouz an ostiz noz-se, liou ar groug en e gerhenn, nemed ar gwel euz eun dornad peziou melen a dousaas dezañ prim.

Just a-walh, bezañ 'nevoa eno eur gwiskamant vad ; ezomm on-devo anezañ c'hoaz... « Te, Penn-dir, kerz da glask d'ar marchosi eur gordenn bennag, kabestr pe nask, unan greñv, avad ! »

Eñ a yeas 'trezeg ar verouri, e bakad war e skoaz. Ar bugel a oa kousket, troet e benn ouz ar voger. Boihardi a zispakas war ar gwele, hini hag hini, an traou 'oa bet o kerhad ; arenki a reas war daol ar gegin pakajou ha buredou ; ar botou a stagas e-pign ouz mantell ar chiminal, hag, o vezañ laketa ar groaz olifant etre daouarn kastiz ar hlañvour bihan, e tennas e dok hag e lavaras :

« Ra zeuio an Doue ganet noz Nedeleg da verraad da boaniou !... Evidom-ni, emezañ o komz outañ e-unan,

lemom bremañ on hurunenn a roue ! Dao dezi, Boihardi ! »...

Ar bugel a chomas e-unan 'barz an ti teñval, en e zorn ar groaz sklêrijennet ruz-gwad gand ar glaou euz an oaled.

Ar chouan a oa eet da gad e gamaradou.

« Peleh eom-ni ? »

« D'ar halvar ! Ha taolet ple na dehfe ar marh kuit diganeoh !... »

An aneval, c'hwez-dour dispenn gand ar redadenn foll en-devoa greet, a gilas da gentañ. Dihwezañ 'ree, erdan m'halle, war-du ar marchosi e-leh ma kleve e gonsort, hag e-nevoa anavet bremañ souden trouz e dreid, o c'houerivad da hervel anezañ.

Boihardi a skribillas e dailler a-daoliou kontell. Neuze, o santoud ne dalveze ket dezañ stourm, ar paour-kêz loen a 'n em lezas da vezañ kaset. Ne darhaoas ket, zoken, eur winkadenn, pa oe arru e-kichenn ar groaz, ha pa oe kroget ennañ d'e huali. Liammet ken n'oa ken evid chom 'n e zav, e kouezas a-hed e gorv 'barz an erh, hep klemmadenn ebed, prest da houzañv c'hoaz gwasoh reuz.

Ar halvar a oa en korn eur park, en-dro dezañ kleuniou uhel goloet a strouezaj hag a goueze 'uz d'ar foñs. An tri den a hourvezas 'barz an douflez, e skeud ar

sort kledourenn-ze. A-ziaraog de', berniou braz a erh skornet a ree 'vel eur voger.

Ar gorventenn a oa tavet. Eun êzenn flourroh a hweze diouz ar huz-heol. Ar houmoul a zibrade evel pa vije bet deut iskilli de' ; 'mesk e save 'barz an oablou, heb na oa trouz ebed.

Er zav-heol, diouz donder ar pellder morlivet, eur voul ruz arhlaz a zispakas, eun heol heb flamm na tan, eun anaon a heol, skuiz a-raog bezañ kroget gand e dro.

Ar chouanted a oa war-hed, fuzuill en o dorn.

Eun toullad tud a deue dre an hent en eur gontañ.

Unan a lavaras :

« Kaset em-eus an hini goz dre dreuz. Dleoud a ra bezañ en ti, deg munut 'zo. Mar n'eus mann a-nevez, ne daleo ket d'ober sin din. »

Chomet e oant en o zav. Eun dorn 'uz d'o daoulagad, e sellent war-du Keralzi.

« Setu-i du-hont ! » eme eun all. « Ya, i eo ! Ober a ra sin dim gand e vouchouer-godell. »

« Mad ar bed neuze », eme an hini en-devoa komzet da gentañ. »... Merer Keralzi eo e oa.

Lesukel a reas, nerz e gorr, eur youhadenn evid rei da intent d'e wreg en-devoa gwelet anezi hag e halle mond d'an ti.

O tizrei neuze war ar baotred a oa deut gantañ :

« ‘Dalv ket ar boan deoh, emezañ, dond pelloh. Ar chouanted n’o-devo ket ma hrohenn c’hoaz ar wech-mañ. »

Oll e tirolljont da hoarzin ha d’ober fent, ha pep hini a yeas war e du.

N’en-deoa ket greet kant kammed, ma welas, demdost d’ar groaz, eun dra bennag astennet o ‘n em draillañ. Ar marh e oa ; diouz ar c’hwez en-devoa anavezet e vestr, hag eh êsaas ‘n em lakaad war e dreid, en eur skei e benn ouz an douar.

« Sell ‘ta, eme ar merer. Moji eo ! A ! mohaj ! Laeron ‘zo aneze ! Trei o hounnar war eur paour-kêz loen !... Dous Dous ! Moji kêz, eh eer da dishuali ahanout. »

Daoulinet e oa e-kichenn ar marh, o flourañ e vruched dezañ ‘vid ma chomje ; gand e zorn all e klaske e gontell ‘vid trohañ ar gordenn.

« Tan ! » eme Boihardi.

Ar merer a gouezas a-hed e gorr, fraillet e benn.

*

‘Barz ti Keralzi e-leh ma ‘n em zile sklêrijenn an deiz, paotrig Keralzi, barr e galon gand al levenez, a lavare d’e vamm :

« O mamm ! ma'z-tije gwelet aneze ! N'em-eus ket
bet a boan oh anaoud an tri roue !... Nag a dreo' kaer !
Setu-me, ar wech-mañ, dihaouet evdi mad !